

CANTIC VAR AR BEREJOU

Var ton : Gnerz Sant-Cado

Me ho suppli, Speret-Santel,
Roït din sclerigen hep appel
D'ober eur c'hantie d'ar berejou,
Util ha profitable peb bro.

Pa meus cavet eun tam amzer,
E tenan da formi eur matier
D'ober eur c'hantie d'ar verret,
Vit ma vo muyoc'h respetet.

Selaou, va breur, clevit, va c'hoar,
Eur guentel ha non pas un histoar
Ha grit varnez reflexion
Marteze e toucho ho calon.

Merquet eo ebars ar scritur.
Ann ilis santel en assur.
Douguen respet d'ar berejou
Pa zeo eno repos ar c'horfou.

Ar groas santel zo er vered,
Var behini Salver ar bed
Eur maro cruel en deus souffret,
Evit hon prena diouz ar pec'het.

Bars ar verred e man ar c'horfou,
Eus hon tadou hac hor mamou,
Eus hor breudeur hor c'hoarezet.
Hor c'heren hac hor mignonet.

Clevit eta ho moëz truezus,
Ma en ho calloud n'oc'h quet vit refus,
Grit evite eun tamic peden
Evit calmi ho loan hac ho anquen.

Ho ped truez, c'houi, va mignonet !
Ho ped truez deus ar re dremenet
Deac'h voa ho zro, hirio ho lini,
Ho ped eta truez ouzomp-ni.

Ha pa dremenot ar verret,
Pedet evit ar re decedet
Eur bater pe eun (de profundis),
Hervez ar c'hustum eus an ilis.

Arretit breman, tud direspet,
Me ho suppli, pa dreuzot ar verred,
Sonjit mad er re zo enni
Evit oc'h arreti d'a bec'hi.

Ma caret sonjal couscoude,
E viot evet-to hep dale,
Neuze evit caout eur beden
E carfac'h gueleit tud ho tremen.

Na gomzin quet a boanniou cruel
Vel o peuz da souffr er bed-all
Poaniou hep ho eternite
Hac a zepand diouz ann ene

Na gomzan nemet deus ar verred
Ha c'hoas ma c'halon so mentret,
Pa zonjan e vin enni interret
Ha cuset deuz ma mignonet.

Petra servich deomp-ni sponta
N'omp quet mest da chom er bed-ma
Hom zud cos a zo consommet
Ho c'horfou en douar ar verred ;
Hac hon re-wi a rai ive
Neus quet ezomp da laret marteze.

Fachet a nep a garo,
Ar virionez certen a glevo,
Na jamæs ne lezin en secret
Ar peuz a zo var ma speret.

Dre ze a laran d'an dud lubric
Petra servich contentin ar c'hic ?
Considéromp an eternite,
Ha nompas hon sansualite.

Petra servich magan hon c'horfou
Pa man er verred hon beïou
Pa m'omp magadurez ar prenvét
Ha pa veomp en douar rentet ?

Goulen a rau ouzoc'h c'hui tud puis-
Perac en em vaguet quer vaillant[sant
A zouar oc'h, da zouar viét rentet
Pa moc'h magadurez d'ar prenvét

Neus quet caz peguer puissant
Peguer terrubl, peguea vaillant
Hou c'horfou tout certen a yelo
Da dempzi douar ar berejou.

Respetet eta douar ar verred
Dre enni ho peus bet passeet,
Da recevo ar vadeziant
Ha pa voac'h deut voarar bed-man.

Dre euni rencot c'hoas passeal
Eaci viot laquet evel ar real
Ha pa sonjit an nebeuta
E viot casset dezi da vreïua.

Tud pinvidic, deut da glevet
Un avis eo, ne quet eur requet
Petra servicho dec'h hoc'h arc'hant ?
No raint nement cresqui hotourmant.

Hoc'h arc'hant var holerc'h a chommo
Goude an heur eus ho maro,
N'o pezo evit ho heritach
Nemet eur lincer, cetu ho partach.

En pever blanquen viot dastumet,
Cetu c'houi breman disheritet

Eus ho touar hac ho madou,
Cetu ennan ho ho recompençon.

Clevit c'hoas ganin eur reson,
C'houi pere zo sujet d'ar boesson,
Profitet ountin ma em c'hredet,
Dre enni evitot calz a regret.

Pa vec'h mev e trejet ar verred
Evel tud brutal ha direspet,
Ha couscoude e clevac'h sonjal,
Ha verred n'eo quet hent vicinal.

Tremen enni enn eur douet,
Pronong enni comzou dizonest,
Ho couscoude goude ho marou,
Hi recevo ive ho corfou.

C'hoas a laran d'an uzurerien.
Na vont quet content hiviziquen
Eus an oll douar er bed-man,
Quen evit mont enni da vreïnan.

Pa ya unan deus ar c'hontre.
D'ho cavout dre necessite
Da c'houl eun tam doar evit ar'chant,
Chetu aman ho c'hompliment.

Just eo var douar e larin dezan,
Me garfe cavout c'hoas da brena.
Nan biquen avoalac'h n'o pezo
Quen a vo c'arguet deoc'h ho quenou
A zouar ne viot quet contentet
Quen ho po bed ho lod er verred.

Pa vec'h oc'h ober baïllezou,
C'hui a vuzul an douarou
Er guisse deoc'h a vo ive gret,
Ho-unan e viot mesuret,
Quemered vo ho hed hac ho lehet
Aroc tailla ho lod er verred.

Douar vo ennan dindannoc'h,
Douar a bep tu, douar varnoc'h,
Cetu c'hui breman e creis an douar,
No velet nac an eol nac al loar.

Pa zeui ho archet da vreïna
An douar o tostaat diouta,
Neuse marteze vo peur grignet
Ho esquernigou gant ar prenvét.

Mar vec'h dezi hirio casset,
Ho querent hac ho mignonet,
A rafe ganeoc'h coaniou bras
A bado marteze betec varc'hoas

Mes me hoc'h assur a ben eiz de,
A vo collet gant-ho ho de

Quen buan ma viot cuzet,
Gand an douar eus ar verred,
Quer buan a viot ancounac'het,
Gant ho querrent ha mignonet.

Cals a boan hoc'h eus bet couscoude
Clasq rapina dezo danvez
Bremâ int occupet bras ha bian,
Mes non pas gaut a loden vian.

Cetu ennan petra zo quiriec,
Ma vec'h quentoc'h ancounac'het,
Rac n'eller quet a barfetet,
En daou plaç posi ar speret.

Cals ann boa aves a laqueat
Da vesur eun tam bouet d'ar prenvet
Hep sonjeal en hoc'h hene
Ac en da badout en eternite.

Ar pez a so ar principala
A dle beza servichet da guenta
Mes ped den a vev er bed.
Eguis no deffe ine bed.

Ma ve deoc'h hirio annoncet
Eveac'h varc'has disi casset
Ac o pe dec mil scouet leve
En ho plaç ha piou a haffe ?

C'houi ve contant d'a chomcouscoude
En plaç ann hini a voe an hirra e vue
Ac eve red dezan ober tro an hencho,
Evel ar paourra so er vro.

Mes petra so quiriec da se
Ne ma quet en etat oc'h hene
Ar sent biscouas n'o deus spontet
Rac en douar benniguet.

C'houlavout a ragante ar memes tra
Evel eun den o tilogea
A ha da eur plaç caer meurbet
Dioc'h a anau disperitet.

Rouantelez an autrou Doue
A so carguet a bet sentr levenes
Mes pa ielo di an ineou
E sai dar verret hor c'horfou.

Labourat a rit gant couraich
Pa veac'h o valissa eur plaç
Var digare het da chom dezan
Mes pegdeit ao sur da chom ennan ?

Labouromp eta evit an evo
Rac nicum a hanomp amana chomo,
Rac ar bet ne ra nemet tremen
Er bet al evit da viquen.

Mæs ar pes a gresq va eston
Pa ran varnezan reflexion
O velet peguen nebeut a interes

A so evit an ene ques.

Ar c'horfou brein a vaguer.

Dilicata ma heller,
Ne seuan quet den excusi
Va unan a blij din reposi
Ne faud quet din brza genet,
Na gant netra beza tourmantet.

Pa vezan squis memes em gouele
E teuan er meas, pe chenchan coste
Mes allas pa vezin e verret
E vezin var ar memes tu bepret.

Douar santel ar berejou.

C'hui a recevo an ollil goafomp

C'hui a receo ar bec'herien

Couls hac an dud a binigen.

An oll sent ac an oll æles

Dar verret e vesont tout casset

An noblans memes ar Rouane

Ac ar paour hep difficulte

Dar verret e sai ar c'horfou

Daoust pelec'h e sai an ineou.

Er verret neus quet a brimote

Evit an dud a galitela

Mes ar henta vo lianet

Arauc d'ar verret e vo casset.

Cetu aman an differans so

Deus an andreajou er berejou

Besa so eur plaç destinet

Evit lacat an hugunodet,

Ac ar re en em brecipito

A vo plantet ives eno.

A hent all neus quet a siffarans

Dre ar re duil ac an noblans

Nemet or re deus calite

O deus var nezo eur mean bez.

Bez a paour so anavezet

Dre ar berniou douar dre a verred

Hep mean ebet enno e chommo

Quen a vo tennet e relegou.

Beyou ar superioret

Eo ar re huellan a so zavet

Evit rei da c'houlzout d'ar re a dremen

Pere eo ar beyou ar velezen.

Mes evit goulet o beyou,

Nouser pe monden pe zalo

Eo ar re so dindanne

Nac an habilla na oar quet se.

Apparisset eo bet o ine

En tribunal ar viryone

Gout a ouzont petra o deus gret

A ne nomp nemet azenet.

O douar santel ar verred

A te zo da veza cals respetet,
Te a ra deomp gouelet hon efotou
Quercouls hac ar mad oberou.

Pa sonje n'ennoc'h douar santel

E sco em c'halon eun taol gontel,

Pa sonjean e vezo coublet

Va c'horf gant dour ar veret,

Ne vo quet anavezet quen goude,

Va relegou dioc'h o re.

Hon ascorniou pa vezint tennet

A vo taulet quen direspet

Dre ar verred ac ar garnel

E faç a glao ac an avel.

Aben eur mareat goude

Evesint destumet adarre

Evit enterri or relegou

Evit a veach diveza quen-avo.

Allas a hanno ne savimp quet

Quen a vo an deis diveza eus ar bet

Quen a vo deis a jujamant

O devez terrubl ac a epouvant!

Eun æl a deso a bers Doue

Da son a trompil da bep ene

Da en emp gaout er berejou

Eleac'h ma seo anterret ar c'horfou.

Lavaret araint d'ho c'horfou sao alesse

Ma en em assemblomp adare,

Gouechal pa voac'h var an douar,

Evoac'h leun an enor hac a c'hloar

Te a heuil-se da santimant,

Breman te po commandamant

Deomp eta en unan hon daou,

Da vont pe d'an naec'h pe d'an draou,

Essamp da ober hon demeuranç

Er vuez nevez a comanç.

Sav a lesse a sao buhan,

Mar saimp hon daou en unan,

Deomp-ni da draoan Josaphat,

Da glevet ho setanç diveza.

Me a requet a vir galon

Clevet moec'an tri pherson,

O guervet a den an deis-ze,

Deut oll ganen va bugale.

O caëra coms e ve ounes

Na lavarfe deomp Map ar Ver'hes

O hene e tan purified,

O corfou en douar breinet

Hac a verit evit recompanç

Ar barados evit demeuranç.

(Propriété.)

Lanhuon, e ty intanvez Ar Goffic, levrer.